

+ Recit c. a n. var un tol vaillant's erreuer a doct da Paris...
 970 C + (971 B) Lankvouen, en ti int. an offic, monsieur-Léon
 F 845-8 / C 305 + 306

C 305

RECIT

Deus ar Maleuriou arruet en départamant ar Var

EN DRO DA SANT-TIENNE

OCCASIONET GANT AN ORACH

AR 14 HAC AR 15 A VIS EVEN DREMENET.



Jesus, ma Salver adorabl,
 Obtenet d'ho pec'her ingrat
 Ar selerijen da discleria
 D'ar Vretonet dre ar vro-ma.

Speret-Santel, deus an env,
 Gret din explican hep dale
 Ar suit dimeus ar maleuriou
 Hac an darn deus ar miraclou.

Quement-mâ so bet arruet
 En departamant Var hanvet,
 Dre deluch dour ha curuno,
 Hervez ma raport ar c'heolo.

Ma speret so epouvantet
 Ha ma memoar so troublet
 O tonet da sonjeal explican
 Eur malheur au effroyaplan.

Un ilis hanvet Sant-Germain,
 Un templ santel d'ar gristenien,
 Gant ar c'hurmio attaquet,
 Etre ma v-at en ofern bred

Habitantet leis an ilis
 A voa o assitan en offic ;
 Den neus gallet sortian ;
 Oll o deus renquet perissan.

An douar a deu da grenan
 Hac a ra d'an ilis coean
 Var gein quemend a voa enni,
 En eur momet, d'ho ecrasin.

O ma Jesus ! tristan malheur !
 Dre eur merq dimeus ho coler
 Perisset tud en fera bred
 Hep ma so hini sortict.

Totalisez gant tud savant,
 Var ar bord a pevarzec cant
 A voa en ilis biniguet,
 Hac a so devet ha beuet.

Nebetoc'h evit eur car-heur
 Goude ma voa fin d'ar malheur,
 E plaq ann ilis so cavet
 Eur stang hir ha ledan meurbet

Flotang ar caeran batinant
 So cavet a donder er stang ;
 A c'hoas e lavar ar scritur
 Ne dap quet ar fonç ar mesur.

Pedomp Doue ar vir galon
 Da accordin deze pardon
 Ha d'ho laqat oll da repos
 Er gloar demeus ar barados.

An autre Richard, deus e di,
 Diouz e tud o quimmiadi,
 A guemeras e diare
 Da vont da ober eun dro chasse.

Pa voa et dee pas dioute,
 E retorn e dro adare,
 Hac a lavar n'eur goir cren :
 Adieu, ma zud, evit biqen.

An Itron, o clevet anezan,
 A commanças da hirvoudan :
 Perac, ma bried, emezi,
 E teut cren d'hon abandoni.

Evel ma hantre er c'hoat bras..
 An dour varnezan a deuas,
 Hac en em retir hep appel
 E appu, er span eur rochel.

Assambles gant an dour courant
 E commanç un tan violent,
 An tempest hac ar curuno
 Quen a sonje e voa maro.

Pardon, ma Doue, emezan.
 Aman e renquan perissant,
 Ep gallout en em repain
 Ha bean cals a vado din.

En eur sevel var eur garrec,
 E neus bet apercevet
 An tan cët diouz an evo
 Var e noblañc ha e vado.

O bebes desolation
 A entreas en e galon
 Guelet consoum'i e vado
 E vred hac e vugaligo !

An irtron, o velet an amzer,
 A supplias prest e mevel
 Da vonet da glasq he priet,
 Mar guie pellec'h e voa eet.

Evel ma c'chantre er coat bras,
 Souden gantan e erruas,
 E appu ar span eur rochel
 Hac e dispositet da vovel.

Sevet, ma mest paour, emezan,
 E oc'h var ar poent da perissant :
 Gant Doue e eo preservet
 Ho pugale hac ho pried.

Respond a eure d'e vovel.
 E lezel enon da vovel,
 Pa oa consommet e vado,
 E vreg hac e vugaligo.

Renquout a ra touet dezan
 Qen men deus credet anezan,
 E voa preservet gant Doue
 E pried hac e vugale.

Gant euls a poan hac a courrach
 E tenjont e mæs ar c'hoat bras,
 En dour betec o dio gazel,
 An otro-man hac e vevel.

An otro so n'em vuvest
 Dre eur miracl e vo rentet
 E quichen gruio ar vezen
 Ne voa e tud evit souten.

Pas voa gant e dud o parlant,
 E teu var e lec'h an torrent,
 Hac ar vezena voa ennan
 Neus groet dezan perissan.

Cheu i chomet intanves
 Ha hi leun a tristidignes,
 Er voezen gant e zri buguel
 Hac i dispositet da vovel.

Pa eo bet bolante Doue,
 E eo et an dour ac'hanc,
 Hac int sicouret da disquer
 Gant Doue hon mest souveren.

C'hoec'h heur ha tregont a amzer
 Int bet er voezen en miser ;
 Da soulagin ho c'halono
 Nho doa nemert an delio.

Ar mest a commande er forgeo,
 An otro Seveni e hano,
 A voa attaquet gant an dour
 Ep gallout dont da n'em sicour.

Prosterni a ra dan daolin
 Da suppliant hon Mest divin,
 Hac hon Mam santel ar Verc'hes
 Da vezan e avocades.

Mar sovétean ma bue,
 Ha ma ouvrierien a me,
 Me a savo eun ti ar c'haeran
 Evit ar pevien er vro-man.

E nebetoc'h evit pemp minuten,
 Eo benzet e ouvrierien,
 Ar forgeo, varc'hadoures,
 Tout in perisset assambles

Henor d'an otro Seveni
 Var an douar ha melodi,
 Ha pa hei divar ar b-d-man,
 Ar barados da jouissan.

Récit deus ar maleurion arruet ou deportement ar Van ...
+ (970c) + 971B F 844-8 / C 305 + 306

RECIT



C 306

COMPOSET A NEVE

VAR UN TOL VAILEANTIS

ERRUET A DOST DA PARIS

AN 3 A VIS MEURS BRETONNES

Var eun ton nere.

Me o ped, assistantet da clevet recitan
Ma-unan hon estonet dimeus a guement-man,
Ar pez a zo arruet var ar c'hopi gallec,
Mar gallan gout ar feçon d'ho zref en brezonec

Mes, qent avanç davantach, e c'houllan sclerijen
Digant ar Speret-Santel da riman pen-da-pen
Qement gir a so scrivet var ar c'hopi gallec,
Ha d'ho esplican facil d'an oill en Brezonec.

Ur vreg yaouanc magueres, o tristeï a Baris,
Bet e querc'hant ur buguel eus a dy ar bourc'his
Da gass ganti da vagan en toes he bugale,
Evit zicour o zevel ha gonit bara dè.

Dre ur c'hoat a renc tremen o vont da gaout ar guer
Hac eo bet attaqueï, siouas ! gant ur voler,
Hac en quisquet en bellec, o tont d'he bonjouri :
Ar goat en e goaziet a deu da remui.

• Bonjour, eme an den-man ; erru oc'h, ma greg vad,
— Ha dec'h pareillament, emei, autreu 'o abbat ;
Sout hon ous o goelet aman-o pazeal,
Rac ar c'hoat-man so brudet da vean un doul fall.

— Doue, eme al laer-man, a preserv pep-hini :
Me so aman o vale da n'cum disenoï,
Hac he meus ma flijador o c'hortos overnia ;
Da laret ma breuvial na deu den d'am zroubla.

O gerzet en e c'hever en deus interrojet
Da c'hout a belec'h e teue ha pelec'h e oa bet,
O voelet e oa ganti var e brec'h ur buguel,
Hac en quisquet ar c'haeran, casi evel eun æll.

Goude en deus gouennet outi incontinent
Ha ne devoa bet netra evit avançamant,
O quemeret ar buguel da zicour e soigni,
Da denna ar virione, ma galje, diganti.

• Eus, emei, autreu 'n abbat, arc'hant a meus toucheï
Cant livr em eus recevet evit e guemeret,
Nemert ma meus ar greden e collin ma bue,
Quet mont emes ar c'hoat-man, an innoçant ha me.

— Na sonjet qet gement-se, emean, ma greg vad ;
Mé a vo dec'h compagnon da vont er mes ar c'hoad :
E zoc'h gant ar c'habiten, n'ho pezo droug ebet,
Nemert ma renqet rentan ar pez o c'heuz touchet.

A zidan e soutanen e tennas ur zabren
Hac e savas anezzi ractal a us d'he fenn.
Hac e c'houleunas ganti ar yaïch' pe ar vue,
Ha laret deau pelec'h e deus lajet ane.

• Plasset e meus anezze en dro d'ann innoçant ;
Goel e ganen ma bue evit aour nac arc'hant,
Caët a ret anezze o tont d'e zispaca,
Ha lest ma bue ganc hac e hini gantan.

Cregui a ra er bugnel en ur memes instant,
Evit dont d'e zispacan da gueñer an a rc'hant
Dre bermission Doue e tañpas ur zabren,
Ha gant un tol, dre vonheur, en deus rannet e benn.

Hep m'en deus bet an amizer da goemer an arc'hant,
E ranqas mervel eno er plac subitamant,
Hac ar vreg, bac ar buguel dre viracl zo rentet
Voar an hent bras pareabl, ep m'ho deus droug ebet.

Tri gendarm a erruas hac o deus gouennet,
O velet ar goad diouti, petra o arruet,
Hac e deveus ispliqet diraze pen-da ben
En devoa lajet ar mestre dimeus ar volerien.

• Dont a reet ganemp-ni, emeze, var-o qis,
Evit ma elfoump goelet ar merq ho vaillantis.
Pa oue foullet an den-man, eo e armo cavet,
Diou bistolen a daon den, ur sabren, ur siflet.

P'ho devoa gret ho ingal hac ho procès-verbal,
Unau demeus ar gendarm a c'hoez enni ractal,
Hac en em rentas pevar deus e gamarado
Da velet o c'habiten var an douar maro.

Pa veljont an habijo e fellas d'he tec'hel :
En um renta a renq'nt pe deuan da vervel,
Ha lezel ho garotti hac ho c'has d'ar prison :
En Paris e recevont ho c'hondaonation.

Lanhwon, en ti intavez Ar Goffic, mouler-leverer.